




Diplôme de Compétence en Langue Breton


Session du samedi 23 juin 2012



Dossier documentaire

Support de la Phase 1

 Document 1	Raktres klas-dizoleiñ Bloavezh-skol 2012-2013	Page 2
 Document 2	An daou ginnig	Pages 3-4
 Document 3	An div greizenn-degemer	Pages 5-6

 Document 1 :

Raktres klas-dizoleiñ **Bloavezh-skol 2012-2013**

Diazezet eo ar raktres war temoù hag a denn d'ar brezhoneg, d'an natur, d'ar sport, d'an istor, d'ar sevenadur, d'an emrenerezh ha d'an diorren padus e Breizh.

Kinniget e vo ar raktres d'ar pemzek lisead eilvet ha kentañ klas a zo o teskiñ brezhoneg el lise Tristan Corbière e Montroulez.

Bez' ez eus kreizennoù klasoù-dizoleiñ hag a c'hell degemer skolidi ha kinnig a bep seurt traoù diwar-benn an temoù-se.


Un digarez e vo d'ar skolidi d'ober gant ar yezh er-maez eus ar skol : buhez pemdez, urzhioù-labour, displegadenoù, gerioù spesializet... ha kement-se a roio talvoudegezh d'an deskiñ brezhoneg. Ouzhpenn-se e vo un doare da vevañ asambles ha d'ober gwelloc'h anaoudegezh an eil re gant ar re all, da zeskiñ ober war o zro o-unan, d'ober sport, da zizoleiñ pe da c'houzout hiroc'h diwar-benn an natur, an istor, ar sevenadur ha gant se, d'en em rentañ kont pegen a-bouez eo doujañ outo.

Ar raktres a bado tri devezh hag a vo kaset da benn er bloavezh-skol 2012-2013.

Rakbudjed

Dispignoù	Gounidoù
15 skoliad x 35 €x 3 devezh : 1575 €	Arc'hant ar skol : 1875 €
Mont ha dont : 700 €	Rannvro (Karta) : 400 €
HOLLAD : 2275 €	TOTAL : 2275 €

Document 2 :



Aotrou,
 Da heul ho koulenn, setu an implij-amzer a c'hellomp kinnig deoc'h evit ho liseidi :

LUN	MEURZH	MERC'HER
Degemer, pourmen war VTT	War an dachenn : mont da weladenniñ un ti- feurm bio	War an dachenn : dizoleiñ loened ar mor, ar bezhin hag ar pesketa
Lein	Lein	Lein
Kayakiñ en aber	Marc'hegañ e Maner Trouzilit	Mont war garr- dre-lien
Koan	Koan	
Beilhadeg : c'hoari gwazi war anvioù-lec'h Tregonou	Beilhadeg : c'hoarioù Breizh (kilhoù kozh, gou- ren, paledoù...)	

Ma vez mat deoc'h, n'ho po nemet kas ar c'hontrad sinet (amañ stag) deomp en-dro.
 Trugarez ha kenavo !

Skipailh An Oaled.

TREIÑ AR BAJENN
 TOURNEZ LA PAGE

Document 2 (fin) :




Deiz mat deoc'h,
Goude ho pellgomzadenn, setu an implij-amzer a ginnigomp deoc'h :

LUN	MEURZH	MERC'HER
Degemer, sevel an teltannoù, dizoleiñ ar bourk, mont da breñañ boued	Pennad-kaoz gant ur miliner, sevel ur vilin-zour (kompren penaos e vez produet tredan gant an dour-red)	Sevel c'hoarioù paotr-saout
Fardañ lein, skaotaj	Fardañ lein, skaotaj	Fardañ lein, skaotaj
Baleadenn en hentoù don : dizoleiñ ar gwez, ar plant hag al loened	Gweladenniñ un dachennad tourioù-avel (pennad-kaoz gant un den a-vicher)	C'hoari gwazi diazezet war ar pezh zo bet desket e-pad ar staj, distro.
Fardañ koan, skaotaj	Deskiñ fardañ krampouezh, skaotaj	
Beilhadeg : deskiñ dañsal ha kanañ gant tud ar vro	Beilhadeg : selaou mojennoù gant ur c'honter	

M'ho peus ezhomm da c'houzout muioc'h a draoù, pellgomzit pe kasit ur mail deomp.

Skipailh Ti ar C'hoadoù.

Document 3 :



Temoù ar c'hlasoù dizoleiñ e brezhoneg

An Argoad

Mont da bourmen e Koad ar Markiz ha Koad an Noz. Heuliañ roudoù loened gouez ha studiañ ar pezh a zebront (yourc'hed, moc'h-gouez, kizhier-koad, sourded...). Selaou laboused, sellet outo ha sevel lochoù-koad evito. Kompren ar pezh a weler (Da betra servij ar c'hleuzioù ? Ar girzhier ? Penaos e vez plantet gwez ?) ha kompren gwelloc'h mont en-dro ar vuhez en natur, da zoujañ muic'h outi.

Bezañ emren

Lakaet e vo ar vugale da vezañ emren : prenañ diankachoù ha merañ o arc'hant, sevel an teltennoù, fardañ o frejoù ha skaotañ al listri, ober war-dro ha diwall ouzh an dafar.

Ar sevenadur hag ar brezhoneg

Mont da welet ur miliner, ur botaouer-koad, ur piker-mein. Deskiñ dañsal ha kanañ, fardañ bara pe krampouezh gant brezhonegerien eus ar vro. Kaout plijadur gant ar c'hoarioù hengounel. Labourat war ar sevel-ti hag istor Kreiz-Breizh en ur vont da welet un iliz pe un ti-feurm.

An diorren padus

Studiañ peseurt gounidoù a c'heller tennañ eus an natur evit kaout energiezh. Sellet a-dost ouzh hent ar boued, eus ar produñ betek an debrñ. En em soñjal war gudenn al lastez.

5 hent an dachenn sport
22160 Ar Chapel-Nevez
02 96 21 60 20

centre-foret-bocage@wanadoo.fr
www.centre-foretbocage.com



AR VRO

Eus bourk ar Chapel-Nevez e vez gwelet traoniennoù glas-tre gant pradeier, kleuzioù, girzhier, hentoù don e-leizh. Sevel saout-laezh a vez graet kalz er vro. Emañ ar gumun etre Koad ar Markiz (brudet evit e wez- fav hag ivin, kalz plant ral) ha Koad an Noz (mengleuzioù arc'hant ha gwez beuz ennañ).



AR GREIZENN

5 animatour a-vicher, 3 sal-labour, ur porzh-c'hoari hag ul letonenn vras, ul liorz hag ur jardin gant yer hag ur c'havr, ul loch-sistr, un dachenn sport e-kichen ar greizenn, ur rouedad hentoù-bale, koadoù bras 10 km pelloc'h... Boued eus ar c'homad ha boued biologel fardet er greizenn. Degemeret e vez ar vugale ampechet. Dafar ispisial zo er greizenn evit ma c'hellfent kemer perzh en holl obererezhioù asambles gant ar re all (ur c'hravazh war rodou, ur sternaj da grapat...)



AN DAFAR

Luc'heilerez, luc'hvanner, urzhiataerioù, levrioù, kasedigoù dre glevet pe dre sellet, lunedeier hirwel, dafar emlec'hiañ...



AR PRIZ

KLASOU DIZOLEIN

Buheziñ, Bod ha boued :

35 € dre zevezh dre vugel



Document 3 (fin) :



Temoù ar c'hlasoù dizoleiñ e brezhoneg

14 straed an Ti-kêr
29870 Treglonou
02 98 04 07 04
anoaled@wanadoo.fr
www.anoaled.com

An Arvor

Studiañ al loened-mor, klask e-barzh ar bezhin, furchal dindan ar reier, kranketa ha pesketa gant an daouarn, sellet outo gant lunedeier-kreskiñ, studiañ penaos e vevont, deskiñ an diforc'h etre ar pioka hag an tali moan, sellet ouzh al laboused e bord an Aber Benniget hag anavezout anezho.

Ar sport

Ar pal eo kaout plijadur oc'h ober traoù a bep seurt, dizoleiñ sportoù nevez, mestroniañ o nerzh hag o c'horf, dielfennañ an endro (stad ar mor hag an avel evit kayakiñ, stumm ar reier evit krapat...) met ivez doujañ ouzh ar reolennoù.

Glad, sevenadur hag istor ar vro

Gouzout muioc'h war anvioù-lec'h Treglonou, lenn mojennoù an aberioù, mont da welet mirdi ar vezhinerien ha savadurioù kozh (chapel Prad Pol, Pont an Diaoul...), dizoleiñ micherioù gwechall.

An diorren padus

Kompren petra a dalv an diorren padus ha lakaat da dalvezout ar pezh zo bet desket dre an ober.



An Aber Benniget, 5 munud war droad eus ar greizenn : plant hag a gresk en dour-sall, laboused, loened-mor. Koad Trouzilit, 10 munud war droad : plant, gwez, loened, istor. Ar maezioù : kleuzioù, plant, glad istorel, laboused...



Ouzhpenn 250 a levrioù hag a gasedigoù diwar-benn al loened, ar plant, ar sevenadur, an istor, ar c'hontadennoù hag ivez bannoù-treset, pladennoù sonerezh Breizh. Bez ez eus ivez akwarioù pesked hag amprevaned, lunedeier hirwel, lunedeier-kreskiñ, ur skramm tele, ul lenner DVD, ur sonenroller, c'hoarioù hengounel, teltennoù, kezeg-houarn...



Un ti bras gant ur sal degemer, 3 sal klas, ul levraoueg, un oaled gant un ostaleri ha c'hoarioù (melldroadig, bilhard Bro Holland...), ul liorz bras ha kloz gwez ennañ, aezamantoù evit an dud ampechet. Graet e vez war-dro ar skolidi gant animatourien, paket an DABU ganto hag apart war ar brezhoneg (DCL live 5). Monig, ar geginerez, a ginnig boued lipous fardet er greizenn. Boued ar vro a vez fardet ivez : kig-ha-farz, krampouezh ha kement a vo goulennet...



KLASOU DIZOLEIN

Buheziñ, Bod ha boued :

35 € dre zevezh dre vogel